

Bennig'it ar priejou christen,  
Ha grit ma o devo lignez,  
Da ober evel ur gurunen,  
En dro d'an daol, en o ziez.

*Ni ho salud etc.*

Divoallit, pa vint var o zermen,  
Ha dilivirit pront ar mammou ;  
Grit ma hellint rei, var o barlen,  
Lez founnus d'o bugaligou.

*Ni ho salud etc.*

Ni erbed ouzoc'h ar bec'herien,  
Dreist oll pec'herien ar barrez,  
Grit ma hellint terri o chaden,  
Ar chaden eus o goal vuez,

*Ni ho salud etc.*

Ouzoc'h Mari ni erbed ivez  
Eneou paour ar Purgator :  
Eus ar baradoz, mam a druez,  
Ah ! dezo digorit an ôr.

*Ni ho salud etc.*

Gloar da viken d'an Tad Eternel,  
D'e Vab-Doue, d'ar Speret-glân !  
Gloar da viken deoc'h, ô Mam santel,  
Itron Varia Kerluan !

*Ni ho salud etc.*

IMPRIMATUR : Quimper, le 12 Mai 1900.

F. CORRIGOU,

Vic. Gén.

Desmoufins, Imp.-Relieur. Landerneau



# CANTIC

## ITRON VARIA KERLUAN <sup>(1)</sup>

E PARREZ CASTELLIN,

A zo pardon bras e Chapel an eil sùl eus a vis Gouere.

*Evrus an dioueronn sac' o d'eus mag'et an Autrou Christ  
gant o leaz, (offis an Iliz.)*

TON ANAVEZET.

DISCAN :

Ni ho salud, Mari, o ! Guerc'hez  
Itron Kerluan bennig'et,  
C'hui 'zo or Mestrez, on Rouanez,  
Or Patrounez, or mam garet.

} bis.

Leun oc'h a c'hraas ha leun a c'henet,  
Bepred oll pur ag oll santel,  
Dre ma z' oc'h bet gant Doue miret,  
Ous ar pec'het originel.

*Ni ho salud etc.*

Ho tiou gostez chast o d'euz doug'et  
Epad nao mis ho Mab Jesus,  
Ac ho leaz pur en d'eus er mag'et,  
Guerc'hez ha mam mil gueich evrus.

*Ni ho salud etc.*

(1) Maria lactans : Ar Verc'hez o rei da zêna d'E mab Doue

O ! gant pebez teneridig'ez  
E stardec'h var boull ho calon,  
Crouer an Env, Roue an ælez,  
Ho mabig ker, Doue guirion !

*Ni ho salud etc.*

—  
Mez divezatoc'h pebez glac'har  
Evidoc'h, Mam carantezus,  
Pa Er gueloc'h, var menez Calvar,  
O tivoasca poaniou scrijus !

*Ni ho salud etc.*

—  
Ama, en ho Chapel ken brudet  
Savet tost da nao c'hant vloaz ' zo,  
On tud coz o d'eus oc'h enoret.  
Evel rouanez vras ar vro.

*Ni ho salud etc.*

—  
Ni fell deomp kerzet var o rondou,  
Ni ' deuio ama d'ho pedi,  
Ho Mab a scuillo varnomp grassou,  
Dre ho taouarn, Guerc'hez Vari.

*Ni ho salud etc.*

—  
Itron Kerluan, gant ho pennoz,  
Roit deomp on oll goulennou,  
Divar ho tron caer, er baradoz,  
Pourveit d'on oll ezomou.

*Ni ho salud etc.*

Ni c'houlén diganeoc'h, da g'enta,  
Beza d'ho Mab, fidel bepred,  
Ma veritimp mont, un deiz, ganta,  
Ha ganeoc'h d'ar guir evrusted.

*Ni ho salud etc.*

—  
Ni ho pedo c'hoas, en ho chapel,  
D'om divoall, en noz ac en deiz,  
Eus peb drouc ac eus ar goal avel  
A c'hoez hirio eneb ar feiz.

*Ni ho salud etc.*

—  
Ar vugale clânv, simpl ha dister,  
Ar re infirm ha mahaniet,  
Itron Kerluan, o ! Mam dener,  
Roit dezo nerz ha iec'het.

*Ni ho salud etc.*

—  
Pa vez galvet ar soudardet iaouanc d'ar c'hazarn.

—  
Setu galvet dindan an drapo  
Or paotred iaouanc, Guerc'hez Sacr,  
Grit ma vint tud calonec ato,  
Dispont dirac an dud fallacr.

*Ni ho salud etc.*

—  
E creiz oll danjerou ar c'hazarn,  
O mirit ato chast ha pur,  
Pur o c'halon, guen-cann o daouarn,  
En kever peb fals plijadur.

*Ni ho salud etc.*